



AR MEMOAR HORRRUPL HA SPOURONUS

DEUS A GAPITULATION INFAMM ANN TREITOUR LACH BAZAINE

EBARS ENN METZ

Laquet enn rimm gant Iann AR MINOUS

A PLEUVEUR-GAUTIER, CANTON LEZARDREN

Paour quez Bazaine, petra zonjez,
O tonet da gapituli ?
Rouinan ac hanomp a glesquez
Ha dont a grenn d'en em daouni.
Hanval e zout deus ann eil Judas,
Hanvet ann Iscariotes.
Pehini he dad paour a lac'has
Hag a voerzas he Vest memez.

Ia. 'vit imitan da faus monarq,
Eun treitour ive ar goassan ;
A blegjout da chouq d'ar c'hont Bismarq.
Eun den e c'hout deus ar lachan !
Indign memes dimes ann hano
Pehini herrie a douguez ;
En lec'h Bazaine 'ta me as calvo :
Guir vignon ar falagriez !

Nann. balans 'bet na zo er bed-man
Capabl da boezan da grimo ;
Da Doue p'as p'ho cont da rentan,
Estonet bras te n'em gavo.
Ho voerzan da vro ha da batri
E commetjout eur c'hrim grevus ;
Enn disesper ive a varvi,
Rag te a zo eur malhurus.

Ia, ma sentjen-me ouz ma ide,
Penevert doujan en envo,
Ha voarnout, treitour, me a losqje
Eur vanden vras a vlasphémmo.
Ra vezo miliguet ann eur-ze
En pehini ma voas ganet :
'Vit mar geou dre da vuir volonte
A teus te bet capitulet.

Da betra a oa dide quemer,
'Vel ma res, ar gommandamant ;
Mar boas en peb amzer temerer
Hag aonic gant da jujamant.
En pad ar mis hag ar c'hoec'h zun
Ma carjes es poa massaret,
Ouz n'em derc'hel da dud tout difun,
Eun nombr brás a Brusianet.

Ia, m'as pije bet groet sortio,
'Vel ma leveres dimp a rez,
Na voa quet quement a armo
N'hac a dud ive bars enn Metz,
En tre daouarn ar Brusianet,
Treitour, lach, evel ma teus groët.
Ar vrud da vezan eur miliguet
Deus ac'hanout, dre-oll, zo ed.

Euzus, treitour, eo lenn ar journal,
Surtout ann devez a c'herie,
Na sesser, en peb lec'h, d'as tamal,
Gant ann ezec'h hag ar groague
Pere a hirvoud, a scuil daero,
Gant glac'bar, anquen hag annoui,
O sonjal en ho bugaliguio
Hag en n'es treitourajo cri.

N'eo quet, Bazaine, da batatessa
A gasses te da zoudardet
En pad ma tebres quic ha bara,
'Vel pa vijes enn eur banquet.
Marvet zo tud did gant ar famin,
En pad ma reste te frico,
Na glesquez mui nemert hon rouin,
Ni ive oll d'as valozol

N'eo quet rein a rez d'he da gredin
N'as pa mui a vuition ?
Na glesques quet c'hoaz diminuin
Bemde ive ho ration ?
C'hoant as poa a-gren d'ho dinerzan,
Ma vransqueljent oll deus ho za ;
Treitour, lach, 'vit donet d'ho livran
Na espernjout, sivoas ! netra.

N'eo que reign a res d'he da gredin
N'as poa mui a vagadures ?
N'ho forces quet ive da dibri,
Dimes ar c'hiq quezec memes ?
Netra, couscoude, dit na vanque,
Vuit hervez moez ar journallio,
Mes d'ar Brusset oll te ho mire,
Dre ma voangt da gamarado.

N'eo quet manquet e z'eo ar groague,
Da derrin dide da figur ?
Coulz memez evel ar vugale,
Me bromet did a dra zur,
Ma queres dont c'hoas en n'hon mesquo,
N'achapi mui, porneant,
Gant arach oll m'as brascaillio,
Treitour, lach, poultron, foreant !

N'eo quet miret e teus da glenve
Couls 'vel da c'hard imperial ?
Ann arm-ze a zo ouz da gos'e
N'eo pelloc'h arm ann den loyal ;
Mes arm eun treitour hag eur Judas,
Eur lach couls 'vel miliguet !
Voassoc'h oud evit eur Barabas :
Meus aon n'em gonvertissi quet.

O ! paour quez lach ! paour quez selerat !
O ! paour-quez den dizenoret !
Ma carjes goude ar gombat,
Te a vije bet adoret.
Nou pas epquen gant ar Fransijen,
Mes gant ann Europ en antier ;
Bremen nemert Metz n'as pe biquen,
Ha reprocho en peb amzer.

(Propriété).

Querz lec'h ma cari d'en em guzan,
Ha p'he dreus-fes memes ar bed,
Eu guirione, did a lavaran,
N'as pezo mui estim a bet ;
Peb-unan parfet annveo,
Ezout ar lach hac an treitour
Enn'out piou mui en em gonfio,
Pa z'out d'ar vro gouir adversour.

Arrao ! arrao voar an dreitourien !
Pere, zivoas ! a zo nombrus !
Arrao ! arrao varn'hé da viquen ;
Ma vezongt oll rentel confus.
Ha grac d'ar generallet neve
Da derc'hel eun tamm voelloc'h penn ;
Mar greont a voelfomp, hep daie,
Pruset d'ar ger buan n'em denn.

Grac da Chanzi, coulz 'vel da Ducrot,
Da Drochu, coulz 'vel da d'Aurelles,
En pep batail hac en peb assaut,
Da c'hargas dioute a bell,
Ann adversourien ze quen nombrus,
Pere a deu d'hon ataquen,
Gras da Vismarq da vean confus
Ha da renquout dimp-ni cedi.

Gras da Vuillaum, coulz da Volke
Hac ive da Frederic-Charl,
Ya, coulz 'vel da Vonder Tan ive,
Betec memes d'ar Prins Royal,
Da renquout divoar breman saoutin,
Divoar douar ar Fransijen,
Ar graso-ze oll a c'houlennin,
Coulz 'vel peuc'h ann Iliz romen.

A piou benag a dezir clévet,
Piou e z'eo ar c'hompositeur,
Deus ar recit-man a meus canet,
Dirazoc'h aman, ma breudeur,
Min a respono buan dean,
Vél ma rafen da bep unan,
Hen deus ann heur hirie da vean,
Hanyet dre-oll ar Minous, Yann.

YANN AR MINOUS.

